

# KENTOG'H MERVEL

## Kantik ar Gonfirmasion

WAR DON : Chileoet gand spont hag eston, pe cunn all.

### DISKAN

*Kentoc'h mervel, o ma Doue,  
Evit bean traitour d'am fe,  
Kentoc'h mervel, pe'n on bugel.  
'Vit ober eur pec'het marvel !*

Ar Vretoned koz, hon zado,  
A lere d'ho bugaligo :  
Kent 'vit bean traitour, bugel,  
Eur Breton mad a gle meravel.

War ma badciant 'meuz touet  
Bean da Jezuz-Krist bepred ;  
D'am gir e renkan-me derc'hel :  
Kristen e vinn bete meravel !

Mar n'on nemet eur bugel c'hoaz  
Eur bugelig dinerz, ziouaz ! —  
Gant zikour ar Spered-Santel  
Me vo fidel bete meravel.

Ar Rouanez Wenn, ar vamm vad,  
A lere da zant Louiz, he mab :  
O ma mabik, gwell eo meravel,  
'Vit ober eur pec'het marvel.

Me m'euz bet eur vamm vad ive :  
'Vel Mamm zant Louiz a lere :  
Bet sonj, mabik, vo red meravel  
Kent 'vit ober pec'het marvel.

Otrou Doue, mar am c'haïet,  
Otro Doue, ma chileoet,  
Ha gret d'in ar ch'ras da vervel  
Kent 'vit ober pec'hed marvel.

D'ar baradoz, o ma Doue,  
Me ici d'ho kwelet goude-ze :  
Ar baradoz zo d'ar bugel  
A varo hep pec'hed marvel.

L. S. E.

---

## KANTIK

### AR VUGALE DA ZAND ERVOAN

---

WAR DON : *Ar mousik bian.*

Azo ar Genkiz a lere  
D'he mab Ervoan Kervarzin :  
« Mabig, emei, noz ha beure,  
» C'houi bedo war ho taoulin.  
» Laret zo d'in abeurz Doue,  
» Pa oac'h bian, ma bugel :  
— « Da vab Ervoan a vo ennn de  
» Eur zant braz en Breiz-Izel. »

### DISKAN

*Otro zand Ervoan vinniget,  
Ma zand Ervoan Breiz-Izel,  
Enn han' Doue ma zikouret,  
Ha me vo bete mervel,  
Me vo eur zand, eur zand ive,  
Evel ma oac'h en bugel,  
Hag eunn devez em o enn Ee,  
Ma lod gand zent Breiz-Izel.*

Ervoan a c'hoerze he lagad,  
O klevet he vamm Azo,

Ha daoulinet tal he vamm vad,  
A lere he bedenno.  
» Mar am c'heret, o ma Doue,  
» E levere ar bugel,  
» A vo Ervoan cur zant neve  
» D'he vroik kez Breiz-Izel. »

Aked vraz a nee bemde  
Da lenn bu e zend ar vro,  
Ha goude pedi a gleske  
Ober evel-t-he d'he dro.  
« Reit d'in, ma Doue, emean,  
» Adalek ma on bugel,  
» Roet d'in ar c'hras da vean  
» Eur zant vel zent Breiz-Izel. »

Ne gere netra barz ar vro  
Vel he iliz Landreger :  
Enn ofern hag er gouspero,  
Ervoan a gane zedcr.  
« Eunn de a vo, ebars ann Ec,  
» E levere ar bugel,  
» Hag e kanin gand ann Ele  
» Ha gant ma zent Breiz-Izel. »

Gwelan a re o kimiadi  
D'he vamm Azo ar Genkiz,  
Gwelan 're d'he dad Helori  
'N eur vond da skolio Paris.  
« Da Baris ma renkan monet,  
» E levere ar bugel,  
» Enn Paris, me vo fur breped,  
» Vel em broik Breiz-Izel. »

Ne oa ket mesk ar iaouankiz,  
O ! nan, ne oa ket unan,  
O studian enn ker Pariz,  
Furoc'h vit ma oa Ervoan.  
Enn Paris kerkoulz hag er vro  
N'ankoueaz ket ar bugel  
Pez a lere he vamm Azo,  
Pe oa 'nn he vro Breiz-Izel.

Enn Breiz-Izel, o ma Doue,  
A zo c'hoaz kalz a vammo  
Hag a lavar d'ho bugale,  
Evel ma lere Azo.  
Ha pe 'ne gret he bask kentan,  
E leront hi d'ho bugel :  
« Deut, bugel, deut da bardonan  
» Da zand Ervoan Breiz-Izel. »  
« N'onn pera vefet 'nn ho pue,  
» N'onn pelec'h veet kaset :  
» Gand ober bolante Doue,  
» C'houi vo evuruz bepred. »  
Evel-se lavar ar vamm vad,  
O tonet gant he bugel,  
O tonet da westan he mab  
Da zand Ervoan Breiz-Izel.  
Hag el Landreger daoulinet,  
En kichen Be zand Ervoan,  
Ar bugel kez a neuz laret  
Vel Ervoan, pa oa bian.  
« Otro zand Ervoan, emean,  
» Me n'on nemet eur bugel :  
» Evel d'hoc'h me garje bean  
» Eur zant d'am bro Breiz-Izel.  
» Gant ma vo bolante Doue,  
» N'euz fors pelec'h vin kaset :  
» N'euz fors pera vin em bue,  
» Me a vezoz fur bepred.  
» Zand Ervoan, c'houi um zikouro,  
» Adaleg ma on bugel,  
Hag evel-d-hoc'h 'm o enn Envo  
Ma lod gant zent Breiz-Izel. »

Kalon douz ma Jezuz, beet ma c'harante !  
Kalon douz a Vari, beet ma zilvidigez !  
Sant Joseph, pedet evid-omp !

L. S. E.

IMPRIMATUR :

Saint-Brieuc, le 4 mai 1895.

AUG. CHATTON, can., vic. gen.